



# CHANSON NEVEZ,

## VAR AR GUEMENERIEN AUTRONEZ.

Var ton *Chanson ar C'hase.*

**E**BARS er blavez present, en dec a vis guenver,  
 E ran d'am speret post un antec-heur amser,  
 Evit rimal ur chanson, ha gent ma liusso,  
 Na vezo den contristet a guement e c'hêvo.

✱

O compren betore tud en devezs goneet  
 Var an oll etadourien, dre bevar c'horn ar bed:  
 Ar re a vo'n distera, hervez va santimant,  
 A so huella montet en amser so present.

✱

O tisqen e Montroules, o toner deus ar guar,  
 Me a so bet surprenet gant ur mæstr Qemener,  
 O clêvet e voa ret din lemel va zog dezâ,  
 Pe e rage d'ar geandarm ractal ma liissona.

7018. 2

Coungoude er memes kær me ameus-passeet  
Mæstrou-barq. geandarmeri ha negociantet,  
Heb ma zon bet en danger da veza prisonier,  
Qen a voa din erruout gant ur mæstr Qemener.

O sina va fasse-port e ty ar Mær on bet,  
Ha mar qeret va c'hredi ez on en em dromplet:  
Deus an depegnation demeus ar C'hemener,  
Me a meus en qemeret evit an Autrou Mær.

Me a c'houlen hep apel petra eo ar ræson;  
Hoc en so erru ur Princ abeurs Napoleon?  
Va c'hompagnon a respont dime e guirione:  
N'endo na princ na bairou-mes on C'HEMENER !

Breman so'n anter-cant vlas e voa bet an amser  
Ne vije get grêt un den gant pêvar Guemener;  
Mæs brêman e c'heritentân en amser so e ren  
Da ober ur C'hemener e renqer pêvar den.

Mont a ra'n Negociant da brena un habit,  
Cass gautan e Guemener. ha ma savas tabit  
Ere tud a voa er stal hac ar guerser mezer,  
Ma rent an Negociant demeus ar C'hemener.

Goude ma voa me uret ha troc'het ar meser  
Ar marc'hadour a selle demeus ar C'hemenet;  
Da rei dezàn da gompren da bed heur eus an de  
Gant aour an Negociant eva guin ha cafe.



Rac, songet, va mignonet. d'ober eur giletet,  
Ne ranqer james qemer ouспен anter-goalen;  
Ha c'hoas e tlefet renta ar pez a chom en tu;  
Mas ar C'hemenet Autrou o zol tout bars er ra.



Emedi dre ar c'hariou ar botret disourci,  
O qerzet voar ar tuyou gante eur paraplu.  
N'en deus map negociant pinvidic eus a guet  
Ha guement so accartet evel ar C'hemenet.



Deus Paris so arruet un tamic Qemenet,  
Gant ar stad a so ennan, me gred e nichfe'n ar.  
Ya, emezan, evit greg me fell din un itron.  
Rac vit merc'h'eun ouvrier ne deo qet eus va zon.



Bremanso anter-cant vras o doa ur marc'h qignet,  
Er C'hastel e Montroules, hervez ameus elevet,  
D'ober fest Qemenetien devez o c'hoariou;  
Mas bremâ ez int bevet gant ar poulardennou.



Cals a dad en deus ha vi deus ar Guemenetien

Rac beza o deus pouvoar voar an etadourien;  
 James devez na gollont evit glao na tourmant,  
 O caaa, o c'huitella e touchont o arc'hant.



M'hoped, tadou ha mamou, ar te'n eus bugalc,  
 Pere o deveus desseign da rei avantach dê;  
 O c'hesset-int d'ar c'hæriou da veza Qemener,  
 Hac e refont ho fortun en un neubeut amzer.



Pebez pligeadur am bez, hac a dlesfen da gaout  
 O velet eur C'hemener demeus a guær o caout  
 Qen alies a nados ebars e ziou fesqen  
 Evel en em gaf a doul ebars en e vesqen.



OUDE... Coll Aïveus ar Guemenetien,  
 Rac me so un tremeniat ne c'houlan choqi den;  
 Chetu me amâ hirio, varc'hoas e chenchin qær:  
 Eru en penn va beach, qên a vo QEMENER!...

FIN.